



**HAL**  
open science

## Feminism Breizh-Izel: ar wagenn c'hwitet

Mélanie Jouitteau

► **To cite this version:**

| Mélanie Jouitteau. Feminism Breizh-Izel: ar wagenn c'hwitet. Kazetenn Ya, 2018. hal-02269522

**HAL Id: hal-02269522**

**<https://hal.science/hal-02269522>**

Submitted on 22 Aug 2019

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.

## Feminism Breizh-Izel: ar wagenn c'hwitet

Mélanie Jouitteau

[melanie.jouitteau@iker.cnrs.fr](mailto:melanie.jouitteau@iker.cnrs.fr)

embannet e *Kazetenn Ya* 665, 06 a viz meurzh 2018.

niv. renet gant Camille Argouarc'h

Fin ar c'hanved all.

Emaon gant ur vignonez o prientiñ senenn ur fest-noz a zo da vezañ. Ur paotr hanterkant vloaz, pouez-mouezh kreñv Breizh-Izel gantañ, a zeu, lentig, da laret pegen laouen eo e vefe aozet ur fest-noz e kreiz-kêr Naoned. Kenderc'hel a ra asuroc'h, o c'hourc'hemenn deomp, ni merc'hed fur a gred distreiñ d'an doareoù kozh, da hengounioù ur mare ma ouie ar merc'hed diouzh o flas dereat. Klask a reomp ur sin bennak emañ o farsal. Blev. A-greiz-galon emañ o klask reiñ pour deomp! Anat eo dezhañ bourriñ sevenadurioù Breizh a dalvez kement hag embann ur blijadur divent oc'h asantiñ d'ur plas breizhadez hengounel, ha lakaat a-gostez gwirioù diazez deomp. O c'houzout ar pezh oa skrivet war ma z/T-shirt hag ar fed e oamp en ur greizenn sokial skwatet gant pegsunioù feminist e-leizh, e kinnigan deoc'h ober *Jojob* anezhañ, peadra da rentañ enor d'e ziouer a *jugeotte*. Bezit dinoc'h, ne oa ket bet gloazet ar paotr met en e spi, met pa oan deuet da chom e Breizh-Izel, dek vloaz war-lerc'h, nag em eus soñjet e Jojob! Pa oan o teskiñ ar yezh e veze displeget din e talvez mont-tre ur sevenadur ouzhpenn da gomz ur yezh. Ar sevenadur-se en em gave bezañ leun a baotred feuls hantervezv hag a vammoù madelezus o c'hortoz anezho 'barzh ar ger<sup>1</sup>, hag me santout tasmant Jojob e zorn yen war ma livenn-gein. Ha posupl vefe em bije brizhkomprenet brozhioù hir ar festoù-noz? Daoust hag e oa ur ster rikoc'h evit na zoñjen da *Vreizh-o-zadoù-kozh*?

### Un emsav feminist rannet e daou

Diouzhtu arruet em boa darempredet kevredigezhioù hag hiniennoù feminist. Ingal e kaven ar memes disparti. Deus un tu e kaven feministed en em ganne war temoù klasel ar feminism (ar feulster gourel, an IVG hag all). En o zouez e santen un dispri boutin evit ar vrezhonegerien, heñvel ma vije Jojob oc'h hiboudal e pleg o skouarn. Sellit ouzh teulfilm *Les chevalières de la table ronde* (M. Helias), a gont istor ar *planning familial* e Penn-ar-Bed. Meleudiñ a ra ar c'hengred etre renkadoù sokial, met kred a rafe an nen neus bet brezhonegerezed feminist ebet e Breizh-Izel. Deus an tu all, e kaven breizhadezed a implije doareoù, temoù ha konseptoù ur feminism a oa din-me hini ma mamm-gozh. Respet bras am eus outi, met ne glot ket he sell gant al live-stourm a-vremañ. An daourannadur-se a vez kavet ingal e broioù kolonizet.

An trevadennerezh a grou un efed gwallgroazhenterezh: ur vreizhadez a glask gounit frankiz he deus da dalañ ouzh daou nerzh enebiñ. Deus un tu, paotred he sevenadur a denn gounit diwar an digoust m'eo he labour (ober war dro an ti hag ar vugale, selaou, souten oc'h ego hag all). Deus an tu all, broadelourien gall a c'houl ganti divrezhonekaat araok damflourañ frouezhioù hollvedel spered *Les Lumières*. N'eus hent ebet e c'hell heuliañ hep bezañ koll. Gwashoc'h e vez ar gwallgroazhenterezh-mañ evit bout trapet gant ur sizailh. Ne gavo ket-hi souten paotred ar vro a warez o c'hallout, hag a c'hell memes, al lodenn broadelour anezho, tamall dezhi kenlabourat gant gwaskerien ar vro. Ne gavo ket souten ar feministed gall, a implij un arguzenn a-ouennour o tamall dezhi da gentañ asantiñ doc'h ur sevenadur

1) Ya, siwazh: <https://payetaformationenbreton.tumblr.com/>

dilerc’hiet. Forzh peseurt choaz e rafe e vez koll div wech. Souezh ebet neuze vefe gorrekoc’h he lusk emfrankiz.

## Kammdro ar bloavezhioù 70

Jojot zo bet bevet gantañ mareoù ar bloavezhioù 70 e deroù e yaouankiz alaouret. Diskouez a ra mat teulfilm *Botoù-koad dre-dan* (S. Daniellou) penaos ar pep mallusañ oa adtommañ ouzh sevenadur ar vro. Silañ ur biz a-zindan pouez ar relijion, gounit frankiz seksel, ya. Met tra diwar-benn stourm ar maouezed evit o gwirioù. Aliañsoù didorr a oa da gaout gant ar baotred evit parañ goulioù sevenadurel don. Jojot e oa dav kenlabouriñ gantañ, ha n’eo ket displegañ dezhañ penaos e zoareoù seksist a live un drougdazont d’ar vro ha d’e vugale. E kerioù bras Europa avat, Naoned ha Roazhon en o zouez, e oa ar maouezed o tizoleiñ o nerzh hollek gant eil gwagenn ar feminism o terriñ. Divesklet veze ar jener etre hon diskouarn diouzh ar reizh etre hon divesker. Torret e veze mennozh un elfenn maouez dre Natur a redfe ac’hanomp d’ober labourioù izelañ ar gevredigezh. Diwar levezon ar studioù marksour, disparti ar jenerioù a zeue da vezañ dielfennet neuze evel ur sistem ekonomikel, gant mouezioù kreñv Guillaumin, Delphy, Wittig, Mathieu, Scott...

Met eil gwagenn ar feminism danvezelour-se e Breizh-Izel a zassone a-bell evel ur mouez estren, disliv. Levezonet kreñv eo chomet neuze feminism Breizh gant an elfennidigezh, a lak un disparti naturel etre ar jenerioù, diazezet war ar reizh. Klask a ra kas ingalded o wellaat an doare ma sellomp ouzh takad pep hini (*Perak dispriziañ ar skaotaj? Bezomp fier d’ober!*). Pouez an arallrevelezh, statut ar mammoù, pouez relijion ar c’houblad, ar redi d’ober bugale, pe skeudenn an ozac’h a zo chomet neuze kalz kreñvoc’h evit n’int deuet da vezañ e-lec’h all. Ironiezh an istor, ar wagenn-se gentañ tomm d’ar vreizhiz, e vez graet *French feminism* anezhi e saozneg, abalamour d’ar skrivagnerezed Cixous, Kristeva pe Irigaray. Dianav-tout int er vro, ha tomm e chomomp kentoc’h ouzh ur feminism elfennour abalamour d’un ezhomm kriz a emgar. Evit sevel ha stourm zo ezhomm deus emskeudennoù galloudus ha liesseurt, ha berr e c’hell bezañ ar peuriñ evit ur vreizhadez.

## Ur stad truezus

Kontadennoù distag deus ar wirionez a zeu neuze da luskellat an ego, evel hini ar matriarka. Ha Jojot da sevel a-du n’eus ket ezhomm a feminism neuze! Padal, ne choaz ket rouedad ar Planning Familial kas arc’hant er-maez deus Breizh abalamour d’un diouer a ezhommoù eno. Ne vez ket beuzet bed al labour e brezhoneg gant maouezed a choaz ar yezh abalamour d’ur statut uhel a zegasfe dezho. Ne vez ket nebeutoc’h a vaouezed drouklazhet gant paotred e Breizh-Izel evit na zo e maezioù all. Bevañs ar maouezed zo 26,6% izeloc’h eget ar baotred e Breizh (Insee 2017) - ar re “ne welont ket an diferañs” a c’hell neuze reiñ d’ar stourmoù ur c’hard deus o lod bep miz. Gell a rafe bout e vefe perzhioù sevenadurel dibar d’ar jener benel e Breizh-Izel a-vremañ - ne ouife den. Pelec’h emañ enklaskoù skiantoù mab[sik]-den evit ar pezh a-sell ouzh plas ar maouezed e familhoù pesketerien e Breizh? Pelec’h emañ an dezenn sokologiezh diwar-benn an daremprejoù ekonomikel etre reizhoù en emsav? Pelec’h emañ an arzouezed hag an arzourien ken barrek da gas ar gevredigezh pelloc’h? Diwriziennet e chom neuze ar stourmoù: un ali hon eus war feulster ar baotred er metroioù, pa vez hon merc’hed yaouank paour o c’hoari biz-meud evit mont d’o labour en uzinoù bras (peseurt surentez, d’ho soñj?). O c’hortoz emamp marteze e soñjfe ar barisianezed ennomp, dre vuzud moarvat.

## Ha bremañ?

Treñ a ra an istor dibaouez. War ar wagenn elfennour e surf aes un emsav ekofeminist nevez a liamm kreñv ar maouezed d'an Natur. Ar mennozh disheñvelderour-se a glot gant feminism an tu dehou pellañ, a ginnig da skouer lakaat da vicher bezañ mamm. Peadra da spontañ c'hoazh feministed gall an tu kleiz, ha da greñvaat o jojotachoù. Levezon ar studioù queer doare *Butler* hag a feminism pro-seks a sav e Bro-C'hall ivez bremañ, hep na vefent komprenet amañ dre eil gwagenn ar feminism en deus o ganet. Kaoz a vez deus emgallouderezh ar c'hastaouiñ hep an disterañ sell ouzh an daremprejoù gallout. C'hoazh ur strategiezh a blij kalz da Jojot, a zo a oad gant ar glianted.

Un hanter-kandvet dale hon eus tapet, ha danjerus stad an traoù. Ha padal, pegement a zo diouzhomp, fur war hon plankennoù surf, o c'hortoz an eil gwagenn da derriñ? Ha ma vefe arru ar poent?

*Elfennidigezh: essentialisme,  
gwallgroazhenterezh: intersectionalité*